


# DIBAB KANTIKOU BREZONEK

Evit Parrouz BOULVRIAG



Mouiez E. THOMAS,  
Gwengamp  
—  
1930

**Dibab Kantikou**

**Brezonek**

**Evit Parrouz Boulvriag**



## **AR BREZONEG HAG AR FE EO DAOULAGAD HON INE**

Tôn : Serr-noz.

### I

Bet oc'h eus gwelet, marteze,  
En ilizou, 'tal Sant Herve,  
Tal Sant Herve, eur skeudenn all,  
Ar bugel fur kas ar Sant dall.

### II

Gant e hencher, a-dreuz, a-hed,  
Mignon Doue rede ar bed,  
Mall gantan klask, evit pedi,  
Ar braoan korn d'eur Peniti.

### III

— « Tad, 'me ar bugel, a galon,  
Arru omp e kreiz eur c'hood dôn,  
Leun a vleidi hag a voc'h goue...  
— Galvet on 'lec'h all gant Doue.

### IV

— Eur gêr a welan en dremwell,  
Ha tier kaer, evel kestel ;  
Eno, 'po boed ha lojeiz :  
— Deomp pelloc'h ; n'on ket eur bourc'hiz.

### V

— Ec'h omp war ôchou eur mor bras ;  
Kreiz an dour, eun enezenn c'has.  
Lec'h oa menec'h santel, gwennant...  
— Ar mor ne jaoch ket eus eun dall.

IMPRIMATUR :

Brioci, die 14a Septembris 1930

Eugène LE BELLEC,  
Vicaire Général.

## VI

— Oh ! kaerat bro, hi marellet  
 Gant lann ha balan alaouret !  
 — Salud d'it-te, bro dudius,  
 Leun eus c'houez vat ar C'christ Jezuz.

## VII

« Ho peniti, beajour paour,  
 Vo en bro ar bleun melen aour,  
 Bleun melen aour, tud kalonek,  
 Lâras d'in an Holl-C'halloudek.

## VIII

Gant ar Vretoned e refet  
 Ar c'hentan eus poblou ar bed,  
 Gouest da sintan, gant o fenn-baz,  
 Ar vro, an Iliz hag ar Groaz. »

## IX

Lann en Argoad, brug en Arvor,  
 Bro ar bleun aour bepred digor,  
 Mamm ar venec'h, an ebrestel,  
 Salud mil gwech, o Breiz-Izel !

## PEDENN

O Sant Herve, Breizad dispar,  
 Fleurenn hon bro, frouez he douar,  
 Miret daoulagad hon ine :  
 Ar brezoneg hag ar gwir fe !

J. S.



## An nenv eo ma gwir vro

Tôn : Le Ciel en est le prix.

### DISKAN :

An nenv eo ma gwir vro !  
 Zonjezon leun a zudi,  
 Steredenn splann o skedi  
 Uz d'am buhe c'houero ;  
 An nenv eo ma gwir vro !

### I

An nenv eo ma gwir vro !  
 Konfordusa gwirione,  
 Kaëra tensor an ine,  
 Kreiz ar bed divalo,  
 An nenv eo ma gwir vro !

### II

An nenv eo ma gwir vro !  
 Krouadur paour forbannet,  
 Ah ! pegouls vin-me tennet  
 Diouz eul lec'h ken garo ?  
 An nenv eo ma gwir vro !

### III

An nenv eo ma gwir vro !  
 Me ho ped, Dréinded saintel,  
 Diouz ho lez kaset eun El  
 D'am c'hlask ha dont endro ;  
 An nenv eo ma gwir vro !

### IV

An nenv eo ma gwir vro !  
 M'ine, na goll ket kalon,  
 Emberr diouz fonz da brizon  
 Te laouen a nijo ;  
 An nenv eo ma gwir vro !

V  
An nenv eo ma gwir vro !  
Doue ! m'ho kar da gentan  
Hag ive gant ma nesan  
E vin unan ato ;  
An nenv eo ma gwir vro !

VI

An nenv eo ma gwir vro !  
Plijadurio milliget,  
Ouz troad ar Groas vinniget  
'Ran d'ac'h tôl ar maro ;  
An nenv eo ma gwir vro !

VII

An nenv eo ma gwir vro !  
Enor d'ar furnez kristen ;  
Lies graz an absolven  
Em ine diskocco ;  
An nenv eo ma gwir vro !

VIII

An nenv eo ma gwir vro !  
Daoust pegen hir eo an hent  
Ma heuilhan roudo ar Sent,  
Vin kurunet d'am zro ;  
An nenv eo ma gwir vro !

IX

An nenv eo ma gwir vro !  
Eno a zudi beuzet  
Pegen dous vo lavaret :  
« Setu fin d'an daëro. »  
An nenv eo ma gwir vro !

J. S.

## Kantig en enor da Zant Briak

Tôn : **Laudate, laudate, laudate Mariam**

DISKAN

Hon Fatron, Sant Briak, klevet ho pugale :  
O miret a beb droug, miret-e da Zoue !

1

En Hiberni ganet,  
N'eur vro leun a fe,  
Hon Briak oe zavet  
E doujans Doue.

2

Ar bugel iaouank c'hoaz,  
Er skôl kelennet,  
Abred a ziskouezas  
Furnez ha spered.

3

Er bed ouz hen gortoz  
Madou hag enor...  
Hen 'wel er baradoz  
Ar gwellan tenzor.

4

Ne c'houenne bezan  
'Met eun dra bemde :  
« Kristen mad er bed-man  
Hag eur zant en Ne. »

5

Hag hoc'h euz dilezet,  
Briak, mamm ha tad ;  
Dreist ar mîr c'h euz douget  
D'imp ar c'helou-mad !

6

O lestrik a zougas  
Briak ha Tual,  
Douar Breiz, p'ho kwelas,  
'Zeugas da zridal.

7

Gant Doue digaset  
War hon douar-ni  
D'hon Zadou c'h eus desket  
Karout... ha pedi.

8

An hano a gristen  
C'h eus reit d'hon zud koz...  
Hoc'h hano da viken  
Vo gant hon parroz.

9

Sonj ho madelezou  
Zo bev aman c'hoaz,  
C'houez-vad ho vertuiou  
Ken c'houek ha biskoaz.

10

O feuteun, ouz ho tour  
Briak 'n eus evet !  
War e lerc'h ar c'hlavour  
'Gav ennoc'h yec'hed.

11

Na dous ez eo d'imp ni  
Mont war ho roudou,  
'N eur gana, 'n eur bedi  
A-dreuz d'ar parkou,

12

A-dreuz d'ar parkou ed,  
A-dreuz d'al lannek,  
Dre greiz ar wâz a red,  
Hed an hent dourek.

13

Na dous ez eo d'imp-ni  
Mont war ho roudou,  
N eur gana, n eur bedi,  
Da c'houenn grasou.

14

Graet ma kerzimp dalc'hmad.  
Beteg ar maro,  
War ho lerc'h en hent mad,  
Fidel d'hoc'h hano.

15

Graet ma virimp bepred  
Dispont, kalonek.  
Ar fe oc'h eus hadet  
Krenv 'vel hon c'herrek !

16

D'hon bugale miret  
Fe grenv o zadou,  
Miret d'e o glanded  
E kreiz ar reuziou !

17

Botfô, breman ken noaz !  
Du-ze 'red bepred  
Eur c'houlz zo eus ar bloaz  
Ar belerined !

18

Ha, slouaz ! pa glaskont  
 Ne gavont netra !...  
 Drez, spern, ken na gavont  
 Evid daoulina !

19.

Vid ober o feden  
 'Lec'h re o Fatron,  
 Na moger, na toën !  
 Pebez rann-galon !

20

Pegoulz 'savo an de  
 — Pegoulz e savo ? —  
 Ma welimp adarre  
 War grec'hen Botfô ;

21

Ma welimp adarre  
 O sevel he fenn  
 Eur chapelig neve  
 War lein ar grec'hen ?

22

Eur chapel war al lec'h  
 'Pedas da gentan  
 Briak hag e venec'h  
 P'arrujont aman ?

23

Pegoulz, Botfô, du-ze,  
 Pegoulz efomp-ni  
 Da bardonna ive  
 'Vel d'ar Penity ?...

24

Hon biniget breman  
 Graet ma vimp ive  
 « Kristenien-vad aman  
 Ha zent barz en Ne. »

G. R.



## KANTIG

### *Itron - Varia - an - Danouët*

#### DISKAN :

Itron Varia 'n Danouët,  
 O Mam leun a drue,  
 Ni ho ped chilaouet  
 Klemmou ho pugale.

I

Dindan ar gwe uhel,  
 Er zaônen, hon Tadou  
 A zavas eur chapel,  
 Gwir vammen a c'hrasou

II

Aman pirc'hirined  
 A zired niverus  
 Hed ar blâ da welet  
 Mam hon Zalver Jezuz

III

An eil a viz c'houevrer,  
 De ouël ar Chadelour,  
 Leiz a dud a gaver,  
 Daoust d'ar pri ha d'an dour.

IV

Ha d'ar sul kenta est,  
Ve lidet ar pardon,  
An holl, mevel ha mestr,  
A zisken en hent dôn.

V

Bep sul, epad Miz Maë,  
Aliez 'kerz an hanv  
Tigaser bugale  
Re yac'h koulz ha re glanv.

VI

Pa zav pedennou braz  
Gwalen pe klenvejou  
D'ar chapel reder c'hoaz  
Vit pellaat ar reuziou.

VII

Er parroujou trô-drô,  
Da Werc'hez an Danouët,  
War tôl-spont ar maro  
Ar c'lanvour 'zo gwestlet.

VIII

Neb a bed ar Vam vat,  
Daoulinet ha doujus  
A c'hône e vennad  
War he c'halon karus.

IX

Meur a vurzud dispar  
Kuzet hag embanet  
Zo c'hoarveet, hep mar,  
Er chapel vinniget.

X

Vit mirout ar gwenan  
Ha kreski o rusken,  
Kaser golo gwen-kan  
Itu ha koar melen.

XI

Ken kuitaat e gerent,  
Ar zoudard ankeniet  
Gemer buan an hent  
Hent Chapel an Danouët.

XII

Ar Vam 'c'houl d'he bugel  
Badeiant ha buhe,  
Dont a ra d'ar Chapel  
Da lâret « Trugare ».

XIII

D'hon Mam, Boulvriagiz  
Touomp gwir garante,  
Ha miromp holl ar c'hiz  
D'he zaludi bemde.

XIV

Goude barn hon Zalver  
C'houi 'vo ouz hon gortoz  
Evit hon digemer  
Toul dor ar Baradoz.

XV

Vel breman ni gano  
Meulodi d'ar Werc'hez,  
Mil bennoz d'he hano,  
Enor d'hon Fatronez.

B.L.

## Kantig en enor da Itron

### Varia Bempinod

Tôn : Kristenien an Armorik.

#### DISKAN :

Itron Varia Bempinod,  
Mamm Jezuz, hon Zalver,  
Stereden ar martolod,  
Esperans ar pec'her,  
Bezet stur hon bag diwern,  
Hon miret de ha noz  
Mac'h efomp, daoust d'an ifern,  
Ganac'h d'ar baradoz.

#### I

Rozenn skedus an nenvou,  
Fleurenn hon lanneier,  
Prinsez koad ar Minodou,  
Sikour al labourer,  
Oh nan ! n'omp ket hon-unan,  
Pegwir chomet genimp,  
Vit hon diwall a bep poan  
Hag ober peb mad d'imp.

#### II

Hirie, de kaér ho pardon,  
Hirie, de bras ho kouel,  
Ni ho salud, o Itron,  
Evel gwejall an El ;  
Meulodi da vamm Doue,  
Konsevet hep pec'hed,  
Perlezenn an holl gwrage,  
Mamm ha gwerc'hez bepred.

#### III

Meulodi d'he madelez,  
Mammen kement a sked,  
Andon ar binvidigez  
E pevar chorn ar bed :  
D'it, labourer, ro ed, foënn,  
D'an den a vor, e lestr,  
Meulodi 'ta, a-bouez-penn,  
Da Vamm dener hon Mestr !

#### IV

Pa zastumomp hon gwiniz,  
Pa bakomp kled ar gran  
E sonjomp en Zakrifis  
Prof korf ha gwad an Oan,  
E sonjomp en mister don  
Jezus Krist, Mab Doue  
O tisken en hon c'halon  
Vit magan hon ine.

#### V

Hon c'hentadou a zavas  
Mesk ar brug alaouret,  
Dindan bolz ar c'hustin glas,  
Eur chapell kizellet,  
Ha den n'helfe disrevel,  
Den n'helfe disklerian  
Ar burzudou divarvel  
Hadet ganac'h aman.

#### VI

Dre demz ya'ch dour ho feuteun  
Vel diouz ho torn a Vamm,  
E tarz grasou, e strink bleun,

Frouez eur flourenn dinamm :  
Ar bugel a gemer ment,  
Ar c'hanavour gav yec'hed  
Hag ar pec'her a chench hent,  
Fulor d'an drouk-spered.

VII

Pa savomp hon daoulagad  
War glac'har ho skeudenn ,  
Pa welomp gouliou ha goad  
Ho Mab war ho parlenn,  
Hon c'halonou zo rannet  
Hag hon genou chom mud ;  
Oh ! na ker eo d'ac'h koustet  
Beza gwir Vamm an dud !

VIII

Abred e oemp douget d'ac'h,  
Ti aour leun a c'hrasou,  
Harpet, kennerzet genac'h,  
War goulenn hon mammou,  
C'houi a zeskas d'imp kerzat,  
C'houi deskas d'imp karet  
Ha bale skany hent mat,  
Ar furnez dilezet.

IX

Ha breman e bâr hon oad,  
Poellet gant ar vuhe  
Dindann tinel ho brouskaod  
N em blijmp adarre  
Diouz gwall-oberou Satan,  
Diouz skoueriou fall ar bed

## KANTIG EN ENOR DA SANT HERVE

War dôn : Breudeur, ni 'glev ho klemmou

DISKAN :

Fleurenn ha frouez Breiz-Izel,  
Mellezour hon farroz,  
Estig dall, barz divarvel,  
Telenn ar baradoz,  
Desket d'imp, o Sant Herve,  
Karet bleun ar furnez,  
Vit tanya, fin hon buhe,  
Frouez ar silvidigez.

I

E lez Childebert kentan,  
Veve eur barz brudet ;  
Deut ar mare evitan  
Da gemer eur pried,  
E tired warzu ar mor,  
Ambrouget gant Doue,  
Hag eur wir verc'h a Arvor  
Ro d'ean Sant Herve.

II

Hervian ha Rivanon,  
Daou zen eus an bibab,  
Stag, gant aked ha kalon,  
Da sevel fur o mab ;  
Pan eo yaouank ar blantenn,  
E vank pleal ganti,  
Rak, tur wech êt da wezenn,  
N'hell den hec'h eüna mui.

### III

Dall eo ar c'hrouadur paour ;  
O dàmantusat reuz !  
Met, 'n e greiz, eur galon aour,  
Eun ine glan en nous ;  
Ne wel ket gened an de,  
Na koantiri an noz ;  
Gwelout 'ra kaeroc'h 'vit se :  
Tu mat ar baradoz.

### IV

Eun darvoud brao, ctre kant,  
C'hoarve gantan, bugel ;  
Eun de bennak, 'koll cun dant  
'C'hoari war eur roc'hel ;  
Vel d'an noz eur c'houlaouenn,  
Pe eur c'hef-tan er sabl,  
An dant-se 'strink sklêrijenn  
Betek bolz glas an oabl.

### V

O tôlenn goant ha gwirion  
Eus buhe Sant Herve,  
A zo bet dre e galon,  
E spered, e ine,  
Dre gaerder e labouriou,  
Dre e furnez dispar,  
Ha dre e gress-lavariou,  
Mestr-skol Breiz hag he gloar.

### VI

Herve a chom emzivad,  
Hon, siouaz, yaouank-flamm,  
Vel eur sant e varv e dad,

'N eur gouelec'h 'tec'h e van.  
A sez da bevarzek vlâ,  
Eo savet dianken,  
Gant menec'h ar c'hood « Duna »,  
Bren d'ean eun delenn.

### VII

Peurober 'ra e studi  
Evit mont da veleg,  
Ha n'eus ket 'barz ar c'hloerdi  
Aketusoc'h Kloareg ;  
Met izel eo a galon  
Ha, daoust d'e vuhe c'hlân,  
N'houl ken, pennek ha breton,  
Met an Urziou bihan.

### VIII

Gant e vistri ijinus,  
Arzian hag Urfol,  
D'ar vugale evurus,  
Eo galvet d'ober skol :  
Bugale, 'me ar Sant,  
Gwell eo deski mab bihan,  
Vit serri eur bern arc'hant  
Ha dastum treou d'ean.

### IX

Eun den yaouank en diegi,  
Yalc'h goullo, ine noaz,  
Zastum poan 'benn e gozni ;  
De e varo vo waz...  
Hen eure mel ar Furnez,  
Vel an douar ar gliz,  
Vit hen ranna en banvez  
Ar skol, ar c'hatekiz.

X

C'hoant da chench micher ha meuz,  
Kaner ha barz lirzin,  
Herve 'dapas e vaz-keuz  
Hag e delenn sklintin...  
Desket gantan dre 'n envor,  
Savet gwerziou santel,  
E kan, e son war doull dor  
Perc'henned Breiz-Izel.

XI

Dre holl 'lec'h tremen ar Sant,  
Koue madoberou puilh,  
Al laeron 'rent an arc'hant,  
Louarn ha bleiz 'deus trubuilh ;  
Ar re dall 'grog da welet,  
An dour 'blomm heb andon,  
Skedi ra lez an Drinded,  
Joa d'an Eskob Houardon.

XII

Eun de, 'lar hon firc'hirin :  
« Skwiz on o foueta bro,  
Stouomp eta d'an daoulin  
Ha pdomp an otro,  
Ma teurvezo dezrevel,  
Dre gomzou frez ha sklér,  
Pelec'h savin ma zinel,  
War ar mèz po en kér ».

XIII

A-benn eur pennad goude,  
Da zibri eun tamm boed,  
C'h azeziont e skeud ar gwe,

Ha diouz hon droug hon-tinâr  
Hon miret, ni ho ped.

X

Hon buhe zo damhenvel  
Ouz al lestr war ar mor,  
Dindan frelou an Avel  
Uz d'eun toul-lonk digor.  
Toul-lonk an ifern ru-flamm  
Avel ar gwal-dechou...  
O Mari, deut d'hon zizamm  
A gen bras gwalennou !

XI

Ar re yaouank a zo dall  
Hag ar re goz dinierz ;  
Eur rum tud a bren peb fal'  
Hag eur rum all hen gwerz...  
Keno, saë ar vadeiant !  
Keno, sklerded ar fe !  
O trec'herez an aérouant,  
Yac'hæit sort follente !

XII

Galeou Alje ha Tunis,  
Spontailh ar bed kristen,  
Voe skarzet war ho tiviz,  
Dre c'halloud ho pedenn,  
Ha kentiz ho bugale  
Ho hanvas gant lokans  
Itron Varia Drugare,  
Gwerc'hez din a zoujans.

### XIII

Dindan eun hano ken kaér,  
O gloar ar bobl fidel,  
Parez Judith hag Esther,  
Ho pedomp n ho chapel,  
Barnet pep dislealded,  
Mellezour a justiz ;  
Eur chadenn d'ar Vorianed  
D'ar re-all ar frankiz !

### XIV

Ni heuillo pad hon buhé  
Gant eun ine gwirion  
Ho klandeed, ho karante,  
Izelded ho kalon,  
Met goulet vidomp timat,  
Pardon ouz hon gwallou  
Dreist-holl graz ar maro mat  
Pa vo fin d'hon deiou.

### XV

Ha dizoc'h hon finijen  
Paeet genimp hon dle  
Eurus en nenv da viken,  
Tost d'ac'h ha da Zoue.  
Ni ho meulo hep paouez,  
Hep paouez ni gano  
Soursenn hon zilvidigez,  
Mil bennoz d'ho hano !

J. S.



En eur park letin a ed,  
Park eun den eus ar furan,  
(Innok 'oa e hano)  
— Grêt ho leandi aman »;  
Resontas an nenvo.

### XIV

Troc'het, indrammet an ed,  
Arôk oa dic'hôdet,  
Pempennet ha paket kled...  
Innok 'zo glae'haret.  
— Ouelet ket, labourer paouir,  
C'houi 'dorno, hepdale,  
Toc'had hir ha melenn-aour  
War beg ar c'horz glas-se ».

### XV

Hag a-dreuz gwalenn-gein Breiz,  
Ar sant d'ober eur gest ;  
E Kerne serr prof a-leiz,  
Pa digoueas 'n eur fest...  
An diaoul (n'eo ket e skeud),  
'Zo serviji ouz tôl,  
Met pell diouz beza 'n e vleud  
C'h a kuit hep goul digoll.

### XVI

Kempennet eur manati  
Ha savet eun iliz...  
Lec'h ne oa 'met dour ha pri,  
Vout parkadou gwiniz ;  
Difrôstet al lanneier,  
Ha sperejou an dud ;  
Grêt eur sav-kein, o meder,  
Rak bloc'h eo ar burzud.

### XVII

Ô lammat a greiz ar strouez,  
Eun de, eur pikol blei,  
Dag azen ar manac'h kêz,  
Kaez 'n eus Gwitharan skei...  
Tapet eo an torfetour  
Ha barnet, gant lokans,  
D'ober d'ar zant e labour,  
Hep dispign na dispans.

### XVIII

Neuze eur prins dinatur  
A garge Breiz a spont,  
Gant e dorfêjou hûdur,  
E youlou divergont ;  
Dorn ouz dorn gant Sant Hervé,  
Holl Eskibien Arvor,  
Diwar gein ar Mene Bre,  
Eskumunug Komor.

### XIX

Hervé 'pleg d'ean pep tra,  
Mein, gwe, tud ha loened,  
Evel d'Adam ha d'Eva,  
Rôk ar c'henta pec'hed ;  
Henvel beli, drant ha serz,  
Frouez ar c'hlanded dispar,  
Garg hon c'halon ken dinerz  
A hirnez, a c'hlac'hар.

### XX

Furnez, furnez vinniget,  
Baradoz an douar,  
Gwir vammenn an eürusted,  
Alc'houe aour dor ar gloar,

Bardellet mat hon ine,  
Rak tenn eo an emgann  
A renkomp ober bemde  
D'imp, d'ar bed, da Satan.

### XXI

Beli ha galloud Herve  
A splanne 'n e amzer ;  
Kelenner ar vugale,  
Konfort al labourer,  
Madoberour ar beorien,  
Barner ar brinsed fall,  
Skouer dinamm ar gristenien,  
Esperans ar re dall.

### XXII

Brasoc'h eo evit biskoaz,  
P'eman breman en nenv ;  
Mar koac'het dindan ho kroaz,  
Mar fell d'ac'h bezan krenv,  
Kaset eur bedennig yac'h  
Betez tron ho Patron,  
Hag ho po, toui 'ran d'ac'h,  
Ho lod eus ar pardon.

### XXIII

E kerz ar c'houec'hvet kantved,  
Koue reut war an ero ;  
E hano 'zo beo bepred,  
Ha biken ne varvo ;  
Biken, keit ma vo e Breiz  
Barzed ha kanerien,  
Keit ha ma klevfont 'n o c'hreiz  
Soniri e delenn. J.S.

## KANTIG EN ENOR DA ZANT ZEBASTIAN

Tôn : Ker-Is.

### DISKAN :

Zant Sebastian, merzer Doue,  
Miret anomp, korf hag ine :  
Miret hon c'horf ouz ar c'hlenved  
Hag hon ine ouz ar pec'hed.

### I

Tro hanter an trede kantved,  
Pa douje 'r bed d'ar Romaned,  
E voe ganet ar gwellan mab  
'N eun tiegez eus an dibab.

### II

Ijinus-bras ha korfet-kaër,  
Plijout a rê d'an Impalaër,  
Ha setu hanvet Sebastian  
Oser e lez Dioklesian.

### III

Prins divade, diboell, distur,  
Kalon dir leun a vreinadur,  
Heman rê eur brezel iskiz  
D'ar gristenien ha d'an Iliz.

### IV

Hep doan da goll karg ha buhe,  
Kalz aon, vat, vê nac'het Doue,  
Sebastian a roe skoazel  
D'ar re oa a vont da vervel.

### V

Dal ma klevas e vestr dirol  
Pesort labour rê 'n abostol,  
Laras, hep barn na berr na hir,  
Hen merzeri a doliou bir.

### VI

Irêna, eur wreg a galon  
Par da Veronik ar Basion,  
Gant louzaou c'houek ha lien frôsk  
A lakas ar merzer yac'h-pesk.

### VII

Leun a fulor hag a gounar,  
Gwir Farizian dirak Lazar,  
Dioklesian glaskas eur stum-all  
Da lazan an oan didamall.

### VIII

Elec'h bir tougn, skourjeou lemm  
Ha bourrevien a sko, a flemm  
Ken eo nijet seder ha drant  
E ine gewrc'h diouz korf ar zant.

### IX

Lusina vezias Sebastian,  
Trech d'ar vourrevien ha d'ar boan,  
Gant Impalaër ar bed lazet  
Gant hini an Nenv kurunet.

### X

E ve — sort na weler nemeur —  
Zo unan a seiz Iliz-veur  
'Zav dreist da Rom ar seized mene  
Rom gristen, magerez ar Fe.

XI

Enoret co en Breiz-Izel  
Dre meur a bardon, a chapel,  
Nep a gas d'ean e beden  
Zo gwarantet ouz ar vosen.

XII

Meulomp hon Fatron lein ar gloar,  
Fleurcn yaouankiz an douar,  
Lezhanvet gant ar Pab Kaius  
Difennour bras Iliz Jezuz.

XIII

Zoudard dispont e kreiz an tân,  
Diwech merzer, o Sebastian,  
Teurveet deski d'imp ive  
Bevan ha mervel vit Doue.

XIV

Bevan feal d'hon Badeiant,  
Flastran e benn d'an aërouant,  
Mervel vel varvê ar zent koz  
Vit mont gantê d'ar baradoz.      J.S.

**Santez Sesilia, patronez ar muzik  
hag ar c'hân**

Tôn : An tôennou.

DISKAN

Santez Sesilia vinniget,  
Telenn sklintin, trôn ar glanded,  
Graët ma tregerno hon ine  
Dindan ezenn flour graz Doue !

I

Ar muzik, ar relijon  
N o deus o-diou 'med eur galon  
Karga an ine a zudi,  
Kana da Zoue meulodi.

II

Ar muzik eo ine ar bed,  
Digoret ho skouarn ha klevfet  
Ha klevfet 'touez ar groadelez  
Eur c'chantik kaër ha dibaouez.

III

An evn 'richan war veg ar skourr  
Hag en draouienn hiboud an dour,  
An ezen c'hwibann er c'hoajou  
Hag ar mor son vel an ogrou.

IV

An dall kez ya a dor da dor,  
Dre an Argoad hag an Arvor,  
Gantan, 'n e zorn, eur penn-baz kraou  
Hag en e gerc'henn ar biniaou.

V

Hon ilizou zo kaër-kaër-tre  
Gloar Zakramant ar garante.  
Met koulskoude int maro-mik  
Anez ar c'hân hag ar muzik.

VI

D'ober petra touriou uhel  
Uz da lanneier Breiz-Izel,  
Ma na glever n o c'hreiz o son  
Kleier a bep ment, a bep ton ?

## VII

Nag a dud 'zo êt en iliz  
Da glask diduell ha diskwiz  
Ha zo deit 'maëz vel Ogustin  
Dianket gant eur vouez sklintin !

## VIII

Pell du-hont en tu all d'ar mor,  
Ar misioner a gav digor...  
Digor en kalon ar paian  
Dre ar muzik ha dre ar c'hân.

## IX

Peb krouadur, bras ha bihan,  
A veul e Grouer hep ehan ;  
An nenvou glas youc'h gloar Doue  
Hag an dud pa n'int ket dife.

## X

Hag en tu-mat ar baradoz,  
Ele ha sent gân de ha noz :  
Gloar padus d'an Tad Eternel,  
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel.

## XI

Bevont eta kân ha muzik  
Vit plijadur paour vel pinvik ;  
Ra refont hirie dreist peb tra  
Meulodi Santez Sesilia.

J. S.



## Santez Thereza ar Mabik-Jezus

TON : *M' ho kar, Gwerc'hez*

### I

Meulomp hirie, meulomp gant an holl ine  
Eur Santez vrás, gloar ar Mabik-Jezus,  
Tour olifant lugern war lein ar mene,  
Boked c'houez-vat, bepred flour ha skedus.

### DISKAN

Santez Thereza, rozenn dispar  
Hadet roz a joa 'n hon zraouienn a c'hlac'har,  
Hadet roz a joa 'n hon zraouienn a c'hlac'har,

### II

Meulomp hirie, meulomp rozenn ar C'harmel,  
Plantet, doureit gant Doue e-unan,  
Pell diouz alan kontammet ar gwal-avel,  
Tost da Jezus, he fried ker ha glân.

### III

Meulomp mil gwech an hini en deus laret :  
« Pec'herien baour, pa vin en neny kentiz,  
Diwar skrimp aour palez ma muian karet,  
Strinkin warnoc'h roz puill, stank 'vel ar gliz.

### IV

O Thereza, c'h omp o c'chedal ho klao-roz ;  
Lezet timat, ah ! lezet da gouezel  
War an douar, diouz stivel ar baradoz,  
Grasou nerzus ar vuhe eternel.

V

O Thereza, santez bremen galloudus,  
Roet d'imp dorn, roet d'imp gwir zikou  
Eneb Satan hag e oberou gwallus,  
Graët ma tree'himp hon gwasa enebour.

VI

O Thereza, roet d'imp nerz, lealdei  
Da heuilh an hent heuilhoc'h pad ho puhe,  
Ha da zoujan vel peus ho-unan dcujet  
Ouz Aviel Jezus-Krist hon Roue.

VII

Lies, siouaz !koummoul an denvalijen  
Nec'h hon spered, a strafih hon c'halon.  
O Thereza, roet d'imp nerz, sklerijen :  
Roet d'imp fe ha karante gwirion.


VIII

An drouk-spered hag ar bed, unan o-daou,  
A glask stleja ac'hanomp d'ar pec'hed,  
O Thereza, ouzimp na refont ket gaou,  
Miret ganac'h, 'c'h efomp d'an eurusted.

DISKAN

Santez Thereza, rozenn dispar,  
Hadet roz a joa 'n hon zraouienn a c'hlac'har,  
Hadet roz a joa 'n hon zraouienn a c'hlac'har.

J. S.



## **GWERZ AR PEUC'H**

Kinniget d'an O .Roux,  
person Gouareg.

TON : *Tro mare ar c'huze-heol*

I

Aboue neuze 'zo dek vià... Ha sonj ec'h eus bepred  
Eus an Eur vinniget-se, talvoudusoc'h n'eus ket...  
Eur ar gonid hag ar peuc'h a zonas ken sklinin,  
Ea unnekvet a viz du, da ze gouel Sant Martin.

II

Eus naontek kant pevarzek da naontek kant  
[triouec'h],  
Pevar blavez hirvoudou... Met hon c'halon da  
[krech !]  
Ken skiltr ha galv ar c'horn-boud, war linen an  
[emgann],  
E sav soude i an urz-man : « Ehanet prim an tan ! »

III

Evit hon brezelidi, sòn termen ar poaniou :  
Digor doriou o frizon, torret o chadennou ;  
Termen ar strap hag ar strak 'ra, noz de, ar  
[mindrailh],  
Ken a gluch gant ar spouron an dispouronnan  
[mailh].

IV

O sioulded estlammus goude ken tèr kurun !...  
— Daoust ha me, 'me Yann Soudard, ve kousket  
[pe dihun ?]  
Petra 'zo ? Pesort k lo ? Achu 've ar brezel ?  
Ha fin 'vije da lac'han, fin iye da vervel ?

V

Ma vije gwir kouiskoude... Ya, mar n'eo ket eur  
[fars !  
Ha beuet e zaoulagad, diou waz daerou a darz...  
Evel ma kan an estig, da noz, er c'hoajou dòn,  
An esperans a fringol war delenn e galon.

VI

Ne gred na komz na zellet ouz ar soudarded all,  
Gant aon da glevet embann ne ra met hunvreal...  
Met, en eun tòl, an avel a skign eur youc'hadenn :  
« Gonid, gonid, gonid omp ! Bevet Frans da viken ! »

VII

An teodou distagellet a dro, a val neuze ;  
Ar vrezellourien eûrus a bok 'n eil d'egile ;  
Ha da ganan, da zansal, d'evan flip ha « pinard »  
Vit eured an ôtrou Peuc'h gant vamezel Viktoar.

VIII

Aboue 'man krog ar brezel, ar soudard zo damloen ;  
Met breman 'n e greiz e sant lammout ar galon den  
Tener ha trugarezus, evel diagagent, er gér,  
Pa oa kichen e bried hag e vugale ger.

IX

Me 'lar d'ac'h, e gwirione, houman eo Eur an  
[Trec'h...  
O mammou ha priejou, bezet pelloc'h dinoc'h ;  
Flastret eo hon enebour, disparl harzou ar Vro ;  
An Alzas hag al Lorrén a zo d'imp hag a vo !

X

Eur n'he deus ket he farez etou'z an holl euriou  
Ha n'hec'h ancouao biken, betek fin o deiou,  
Ar re a oas, keit all, derc'hel, stourm ha mervel...  
Dreist d'an dibab, m'ho salud, gwir v'bien Breiz-Izel !

XI

Ar c'helou mat a strinkas evel eul luc'chedenn ;  
Anavezet ec kentiz er pellan bilajenn ;  
Ken skanv hag eur c'harv, Yann-grenn a bign  
[dioustu en tour ;  
Hag hon c'bleier da richan gwalc'h o ineou flour.

XII

Ar re goz hag ar merc'hed, ar bobladur vihan  
N'ankouafont ket, ive, an de vougas an tan ;  
An heol skedus en oabl gias a lâre divadin :  
« Doue 'ro ar peuc'h d'ar Frans dre vennad sant  
[Martin ! »

XIII

A-benn eur pennad goude, hon soudarded didrec'h  
A gemeras hent ar gér, lore gante o bee'h ;  
'N eur zont eus an hent-houarn, e kavont war ar  
[c'hæ  
Pried ha pôtredigou koantoc'h 'vit bleuniou mae.

XIV

Didalet ar varikenn ha dao d'ar jistr neve :  
« Pan eo distro an Trec'hher, binnigomp al lore ! »  
Leun-bloc'h 've bet joa an holl, paneved oac'h ken  
[stank,  
Intanvezed digonfor!, emzivaded yaouank !

XV

Pemzek kant mil, pe dremen, a gouëas en argad ;  
O hanouïou 'zo moulet 'barz er marbr pe er c'hoad ;  
Kizellet int dônoc'h c'hoaz 'n ho kalon, ma Doue ;  
Bevet hon merzerien vrás 'pad an eternite !

XVI

Kent aehui, 'vel Konde, war lann-ar-gann, Rokroâ,  
Kanomp ive a-bouez-penn da Zoue hosanna,  
Pan eo plijet d'ean rei ar peuc'h hag ar frankiz  
D'hon bro muian-karet Frans, merc'h henan an Iliz.

XVII

Met kemeromp skouer, dreist-holl, war Judas  
[Makabe] ;  
Pedomp evit soudarded kalonek hon arme  
Maro e kreiz ar stourmad ha bêpred diaravel...  
Pedomp, tud vat, ya, pedomp 'vit Anaon ar brezel.

J. S.

**GWERZ FIN AR BLA, TRUGARE  
MA DOUE !**

Tôn : An Hirvoudou.

DISKAN :

An dud, allas ! 'zo divalo ;  
Tamallout a reont, gant brud,  
D'an Otrou Doue o foanio ;  
War e vadobero 'maint mud...  
Evit ar blâ 'zo tremenet,  
Pinvidigez pe baourante,  
Vit kement e peus d'in roet,  
Trugare d'ac'h, o ma Doue.

I

Evit ar goulou-de lirzin,  
Pa dipr Phœbus e varc'h moue gwenn,  
Evit ar serr-noz ken rupin,

Pa bar Phœbe war goumm al lenn,  
Vit al lapoused o richan  
Er zaonennou a-hed an de,  
E kanan ive ma unan :  
Trugare d'ac'h, o ma Doue.

2

Evit an holl vokidi kaër  
Ha deliou glas ar c'hoad uhel,  
Evit milour arc'hant ar stêr,  
Ar skorn, ar glao hag an avel,  
Vit gliz-noz ha lann alaouret,  
A ro stumm ha lufr d'ar mene,  
Vit tinell an oabl steredet,  
Trugare d'ac'h, o ma Doue.

3

Vit an ezennig dous ha flour,  
A vale c'houez-vat ar bleuniou,  
Vit ar foën sec'h e tal an dour  
Hag a garg a c'hoarz ar prajou,  
Vit ar vederez melen-aour,  
Gwellan prezant peb blâ neve,  
A galon vat, met siouaz, paour,  
Trugare d'ac'h, o ma Doue.

4

Vit ar yod kerc'h, ar c'hrampouez tom  
Ro da Vreiziz pennou kalet,  
Vit an ti bihan lec'h 'oun chom,  
E skeud an iliz vinniget,  
Vit ar frouez c'houek, ar re velen,  
Goue, d'ar c'hoz-amzer, eus ar gwe,  
Vel boulou aour war ar c'h'azou,  
Trugare d'ac'h, o ma Doue.

## 5

Evit kement a c'hrasou all,  
Ha karante, ha madelez,  
Nerz da drec'hi ma zechou fall,  
Harp eneb ma zempladurez ;  
Vit an Hosti zakr ha gwenn-kan,  
Bara dreist-natur an ine,  
E youc'hant noz-de, heb ehan,  
Trugare d'ac'h, o ma Doue.

## 6

Bemde, war ven sakr an oter,  
Vit ho trugarekât ervad,  
E kinnigin korf ma Zalver  
Hag ar c'haliz leun eus e wad...  
Ha, pa deuio 'vidon an noz,  
Am eus esper, o ma Doue,  
Da veuli, lein ar Baradoz,  
Vit birviken ho trugare.

J.S.

## Da Zoudarded Boubriak maro evit ar Vro

## DISKAN :

Enor ha gloar d'hon Zoudarded ;  
Barz ar brezel, int bet marvet,  
'Vit difenn hon Bro garet.

## I

Pa zonas glaz 'lein an touriou.  
Boulvriagiz, 'kreiz o douarou,  
A baouezas o labouriou.

## II

Galv hon Mam-Vro oa ken pedus,  
Ma teujont d'ar gêr, hirvouduz  
Da gimiadi fonnus.

## III

Oh ! na stard oa an Disparti,  
'Tre an holl gerent eus an ti !  
Ret eo gwelet vit kredi !

## IV

Pôtred yaouank leun a vuhe,  
Tadou, d'e gwreg ha bugale.  
D'an Illiz redas neuze.

## V

Da glask zikour ha nerz-kalon.  
Gant ar Werc'hez hag o Fatron,  
Gant o Zalver ar pardon !

## VI

Kenavo, Gwerc'hez vinniget,  
Kenavo, Sant Briak karet,  
Diwaller o zoudarded !

## VII

Ni dalc'ho brud vat Breiz-Izel !  
Ar gwir Vreizad pa zav brezel,  
Ne souz ket : Kentoc'h mervel !

Enor ha gloar d'hon Zoudarded !  
Barz ar brezel, int bet marvet  
'Vit difenn hon Bro garet.

## VIII

Falc'het int, bevet 'harz ar goad  
Pôtred yaouank eus a bep stad  
Kreiz o nerz, er c'haéran oad.

## IX

Er c'hoat, er ster, war ar blenen  
War ar mene hag en draounien  
E kousk hon Brezelourien.

## X

Gant o c'horfou 'deus graet ar gled,  
Sparlet an hent d'ar Brusianed  
A lampe vel leoned.

## XI

Lampet o doa evel bleizi  
War an denved peuc'hus n'o *z'*  
Skrignet o dent d'o dibri.

## XII

War ster ar Marn hag an Iser,  
Zo chomet meur a Vreizad ter,  
Hon re eo braz o niver.

## XIII

Hed an dalben er berejou,  
E weler war dal ar c'hroajou  
Hano pôtred hon meziou.

## XIV

Hano hon Zent koz 'zo livet  
Stank war beiou ar zoudarded  
Eno 'man ar Vretonned !

## XV

N'o zouez me wel an Otrou Mer  
An abad, ar Mestr-Kelenner  
Ha kanchou tud a vicher.

Enor ha gloar d'hon Zoudarded  
Barz ar brezel, int bet marvet  
Vit difenn hon Bro garet.

